

DreistOrdinal : ar Mor-Bihan edan selloù Kourtney Roy e Limur

- Mis à jour le Thursday 16 October 2025



@ Kourtney Roy

Get luc'hskeudennoù Kourtney Roy omp kouviet da deurel ur sell nevez àr ar savadurioù a anavamp mat, evel Palez an arzoù amañ.

Un dibab livioù-flamm, ur c'hinkladur just-evel er filmoù, arvestoù strafuilhus en àrdroioù hag a hañval bout sioul d'ar c'hentañ gwel... setu bed Kourtney Roy, luc'hskeudennourez gall-ha-kanadian anezhi, brudet evit hez emboltredoù giz gwezharall dreist-holl. E 2024 e oa bet kouviet an arzoerez, e framm un urzhiad publik, da luc'hskeudenniñ monumantoù o savouriezh a vremañ er Mor-Bihan. Da neuze e oa bet é vale dre an departamant a-bezh, a Garnag d'an Oriant, en ur dremen dre Wened... Disoc'h he fakadur prizius zo da welet e Limur adal miz Gouel-Mikael betek miz Genver.

32 luc'hskeudenn tapet get an arzoerez zo laket àr wel àr un dro get dielloù, tresoù, maketennoù ha tresadennoù en diskouezadeg-se ma kenniger gwelet, en tu arall ag an tu ordinal, an tu dreistordinal ag ar savadurioù-se a zo en hon endro pemdeziek evel Palez an Arzoù e Gwened, peotramant ramparzhioù Kerjouanoù en Arzhon.

Evit gouiet hiroc'h : www.ciap-limur.bzh